

# AR CHEVALIER ROLLAND D'HE BRIED ISABEL

(VAR UN TON ANVEET)

Red eo e lavare goëchall,  
Rolland pried tener Isabel,  
Red eo me renq partial,  
Vit monet d'an Turqi d'ar brezel,  
Goëla a res din-me breman,  
A kaon a res din var da veno,  
Eun all abers nemeur aman,  
A deui da zec'ha pis da zaëlou. (*bis*)

Ne get possubl did e vanqfen,  
En eur oëla eme Isabel,  
Did e vezin da virvigen,  
A pa vez maro bepred fidel,  
Ma zeufen da ankonac'hat,  
An ini a meus kement karet,  
Ra zeui dirag va daoulagad,  
En speç da rebech din va phec'het. (*bis*)

Mar demezan var va debes,  
Er banqet em c'hichen azeet,  
Deut da gass ac'hanon d'ar be,  
A lavaret vo me o pried,  
Rolland a zo maro sioas,  
Izabel e deus caon ag anqen,  
N'he ket echuet mad ar bloas,  
Ma teuas eur marqis d'he goulou. (*bis*)

E renq e c'henet e arc'hant,  
A zallas calon an intanves,  
Rei a rës e c'honsantamant,  
Ag assinet e oë an debes,  
Ar gerent oll nem assamblat,  
Ar banquet a gomansas souden,  
Ne oant get c'hoas p'eur azezet,  
Eun oficer oa en o c'hichen. (*bis*)

— 2 —

Spontus bras a rë e velet,  
 Rag er guis-se guisket en ouarn,  
 Evel-se tout oa goloët,  
 Kerkouls e vizach vel e zaouarn,  
 Ne gredent ket sellet e faç,  
 Couscoude o doa c'hoant de velet,  
 Ag en ep finval d'eus e blaç,  
 Deus Isabel a zelle parfet. *(bis)*

Ar mab neve ken zouezet,  
 A n'eus lavaret en eur greña,  
 Tennit o casq ya me o ped,  
 Ag azeet ganemp da leïna.  
 E gasq neuze pa n'eus tennet,  
 O bebeus orrol meurbet c'hoëro,  
 Scrijal a rë tud an eured,  
 O velet bizach un den maro. *(bis)*

En e za plom ar geanteris,  
 A zelle parfet eus lzabel,  
 Sell emezan sell ouzin pis,  
 Me e Rolland lazet er brezel,  
 Din-me goëchal e poa prometet,  
 A pa zigoëche ganen mervel,  
 Biqen pried pige kemeret,  
 A din e viges chomet fidel. *(bis)*

Asten a ra e zorn pouner,  
 Caër e deus crial a deplori,  
 Gant an douar int bet lonqet,  
 A c'hoas e c'hlefjoc'h oc'h irvoudi,  
 Ar marquis zo chomet mantret,  
 Ag a neus laret ken partia,  
 Me a zo eun den goëll dapet,  
 Ag a m'eus eur sort deus an trista. *(bis)*

Isabel a deu di bep bloa,  
 Gouisqet er gis mont da eureugi,  
 O crial ato oasoc'h oas,  
 Ar speç ne ziscrog morse outi,  
 Abaoë den gant aon mervel,  
 Neus gret demeuranç er c'hastel. *(bis)*

*(Propriété de l'auteur)* FIN

ТАОС.